

CHANSON MELANI

TS: Jean Philippe sur
c'konte

Bal: No vaez h'k

TD: suite de "Nau'leuni"
su degn y FQ
chat, j'p'p'ds

Me 'zo 'hont da zisklêriañ ur jañson a neve
hag a zo bet kompozet gant den a galite [≈ din]

nag un den a galite deus a ganton Kalleg
hag a zo deut da noter de barrouz Melioneg

mont'ra da di 'wel't ur plac'h peta Gwendaol'Pellant
met alles pete tal dañ pe ne n'ê ket d'hi c'hoant

an terruplañ plac'h yaouank 'ba' kartier Zant-Houarneo
ur verc'hig da Varivon ha da baotr Kerio (Cariou)

dre ur zulez d'apete 'haies an den yaouank
da gavet an Tomas koz 'balamour d'e verc'h koant

bonsoar dac'h c'hwi Tomas koz, bonsoar dac'h a laran
koñje ho merc'h Melani diganac'h 'c'houlennan

'Tomas koz 'n'eus respontet n'ê ket fachtet gant ze
mag ê kontant Melani, ze 'vo gwelet goude

bonjour dac'h Melani vian, plac'hig joaüs ha gae
pe en deut petak ho ti an deus a himie
pa 6

me 'zo digaset amañ deus 'berz un aotro mat
da c'houlenn konsañtamant gant hoh mamm hag ho tad

'vit goulenn konsañtamant gant ho tad hag ho mamm
met diganac'h Melani 'c'houlennan da gentañ

met diganac'h Melani a c'houlennan da gentañ
gras ta' dec'h akordet din deus pezh a c'houlennan (da)

Melani 'neus respontet d'an den yaouank treitour
me ne ran ket kalz a gas 'vit gwel't ur gwenedour
de la ch'k

ut gwenedour n'ê ket mat 'met 'n ur pres alveiet
hag alveio an tansor diganen a firet
pa

na pe viñt kaset d'ar park da labouret douar
ô neuzen 'ta Melani, c'hwi 'po keññ ha glac'har
C'hoar g'ard' (indis) g'and' en'v'j'c'

c'hwi 'po keññ Melani vian bezañ ma refuzet
ka 'n aotro deus Melioneg 'tay ket kin d'ho kwelet

disroet 'ta'n den yaouank ha deut war ho kiz'
ka re interes ho peus, n'on ket 'vit ho refuz
qui ne mande plus

an den yaouank 'ês d'ar gêr, e galon 'zo kontant
o tont d'annoñs e yelo d'an den chentil yaouank

pe oa erru
pe oa erru war e giz e ba'ti an aotro
pesort mod ema bet kont intredac'h c'hwi ho taou
kommand e la allan' e la vour
nag an traou a gerza mat hag an dud so kontant
'neus ket kin 'met ar re goz 'vañka kavout arc'hant
de la vour
na fi ze med* an aotro, me 'meus finesti 'wac'h *(eme)
ma ne vanka 'met 'n arc'hant, me 'vo dimêt d'ar plac'h...

Despudet genin'ba'ti Ujen Greunel'Zin-Trefin 'pad miz-est
1973, un nozez da goan i kerz an Odise 'mamp grêt'sams
ga'Vas-Koat dre Minez Arr' ha Minez Du deuzalek Goareg
beket Spei't.

E.Salaün 1993

E'hoant am eus da ziskleriañ eur chanson (ha) never
Hag a zo bet kompozet ~~dean~~ den a galite

Ha dean den a galite deus ar ganton Kallac
Hag a zo deuet da noter ba parrouz Mellioneg.

Mond ara da wellid eur plach petag) Guennadaol Pelan
Alled allag, petra tal dan pa rei de ket ~~le~~ c'hoant

An terraplant plach yaouank ba kartier sant Hlouarno
(Ha) 'zo eur verh da narinonne ha da paotr Kerion

Dre eur salnez d'abele / hañez an den yaouank
Da gaout an Thomaz koz balamour d'e verh soant

"Bonsoir dach c'hui Thomas koz, bonsoir dach a laran
Kerion, ho merh Melanie digenach c'houlenan."

Thomas koz 'neus respontet: "d'onkelt) facht gant ze;
allag eo kontant Melanie ze no gwelet goude.

Bonsoir dach Melanie nihan plachig joyus ha gae
Ba on deuet petag ho ti an devez a hirie

Me 'zo digaset aman deus bezz an aotrou mad
Vid goulen konsantement gant ho mamm hag ho tad

Vid goulen konsantement gant ho tad hag ho mamm
Alled digenach Melanie c'houlenan da gentañ

Alled digenach Melanie da gentañ c'houlenan
Ha dre graz akordet din deus pez a c'houlenan

Melanie 'neus respontet d'an den yaouank treglour
"Me ne ran ket kalz ar gaz mid gwelid eur gwenedour

Eur gwenedour n'eo ket mad imed 'n ~~ho~~ press alchweest
Hag alchweest an tensor ve genin da ~~mad~~ niret

- Ba n'eo ket gaset d'ar park da labour an douar
A ha neuze tu, Melanie, c'hui 'zo keun ha glachar

C'hui 'zo keun, Melanie nihan, bezañ 'meus refozet
Dre 'n aotrou deus Mellioneg deg kelt) ken d'ho kwelet

- Distroet a ha, den yaouank ha deuet war ho kiz
Dre re interes ho peiz, non ket mid ho refoz."

An den yaouank heas d'ar ger da galon zo kontant
E tond d'annoñ e chibou d'an den chentil yaouank

Ba eo erru war e giz e ba ti an aotrou:
"Beseurt mod emañ bet konte etredoch, c'hui ho taou

Melanie

C'hoant am-eus da ziskleriañ ur chanson a-nevez
Hag a zo bet komposet d'un den a galite

Ha d'un den a galite deus ar ganton Kallac
Hag a zo deuet da noter ba(rz) parrouz Mellioneg

Mond a ra da welet ur plac'h peta(g) Gwenndaol Pelan
Med allaz, petra tal dan pa nei ne ket e c'hoant

An terruplañ plac'h yaouank ba(rz) kartier Sant Houarno
A zo ur verc'h da warivonne ha da paotr Keriou

Dre ur sulvez d'apete haies an den yaouank
Da gaouet an Thomas kozh abalamour d'e verc'h koant

"Bonjour deoc'h-c'hwi Thomas koz, bonsoir deoc'h a laran
Konjet ho merc'h Melanie diganeoc'h e c'houlennan

Thomas kozh en-eus respontet: "N'on ket fachet gant se
Mag eo kontant Melanie, se vo gwelet goude

Bonsoir deoc'h Melanie vihan plac'hig joyus ha gae
Pa on deuet beteg ho ti an dervez a hirie

Me zo degaset amañ deus perzh an aotrou mat
'vit goulenn konsantamant gant ho mamm hag ho tad

'vid goulenn konsantamant gant ho tad hag ho mamm
Met diganeoc'h Melanie e c'houlennan da gentañ

Met diganeoc'h Melanie da gentañ e c'houlennan
Ha dre graz akordit din deus pezh a c'houlennan

Melanie (he)-deus respontet d'an den yaouank treitour
Me ne ran ket kalz a gas 'vit gweled ur gwenedour

Ur gwenedour n'eo ket mat 'met 'n press alc'hweet
Hag alc'hweio an teñzor vo ganin da viret

Pa viet kaset d'ar park da labour an douar
Ha neuze 'ta Melanie, c'hwi po keun ha glac'har

C'hwi po keun Melanie vihan bezañ ma refuset
Kar an aotrou deus Mellioneg (ne) deui ket ken d'ho kwelet

Distroit 'ta den yaouank ha deuit war ho kiz
Kar re interes ho-peus, n'on ket 'vit ho refus

An den yaouank (a) yeas d'ar ger e galon zo kontant
O tond d'annoñs he c'helou d'an den jentil yaouank

Pa oe erru war e giz e-barz ti an aotrou
"Peseurt mod emañ bet kont etrezoc'h c'hwi ho-taou

Nag an traou a gerza mat hag an dud zo kontant
'neus ket kin 'met ar re goz 'vañka kavout arc'hant

Na fi ze med an aotrou, me 'meus finesti 'wac'h
Ma ne vanka 'met 'n arc'hant, me 'vo dimêt d'ar plac'h